



Galv da vanifestiñ d'an 29/05 e Gwengamp

Emgav da 1eur30 e ti-gar Gwengamp

War-lerc'h manifestadeg kaer an 13 a viz Meurzh e Kemper, ha hini an 20 a viz C'hwevrer a-gevret gant ar galv lañset gant ar strollad Rouedad Ar Brezhoneg, soutenet gant ar strollad Evit Ma Vevo Hor Yezhoù evit ul lusk broadel ha gant ar strollad Unanet Evit ar Brezhoneg, oc'h ambroug degouez Ar Redadeg.

E c'halv Diwan da vanifestiñ evit

- **Difenn sevenadur Breizh hag ar brezhoneg**
- **Gwareziñ hon hentenn treuzkas dre soubidigezh a zo lakaet kalz en arvar**

Seziz ar c'huzul Vonreizh a-enep al lezenn Molac : un daqadenn a-enep hon hentenn dre soubidigezh kevredigezhel !

War-lerc'h bezañ bet degemeret al lezenn Molac d'an 8 a viz Ebrel e vefe bet aozet ur seziz dre guzh gant kabined Ministr an Deskadurezh stad. Tagañ a ra ar seziz-mañ ar mellad war ar skodenn skol a sell ouzh hor rouedadoù kelenn dre soubidigezh.

E-kerzh an divizoù e Kambr ar gannaded en doa Ministr an Deskadurezh komzet eus « Diwanisation » eus ar sistem.

Met ouzh petra o deus aon ? Petra rebechont deomp ? Stummañ skolidi a heuilh penna-benn programm an Deskadurezh Stad, skolidi a dap disoc'hoù mat d'ar priziadennoù ha d'ar vachelouriezh hag int-i gwir vrezhonegerien ?

Ur rouedad skolioù, laik, digoust ha digor d'an holl eo Diwan !

Skodenn skol : un dioberiantiz kabluz a-berzh ar Stad !

Ma vez nac'het ar skodenn skol pe ma ne vez ket roet ar sammad mat gant an tiez-kêr eo notennet an dra-mañ e Kod an deskadurezh er mellad l442-5-1 : « *Ma ne vez ket kavet un diskoulm e vo bodet maer ar gumun m'emañ ar skolidi o chom hag atebeg ar skol gant dileuriad ar Stad evit gellout kavout un diskoulm war ar sammad da reiñ evit mad skoliata ar vugale* ».

E miz C'hwevrer e oa bet goulennet en un doare ofisiel hanterouriezh 5 prefeti departamant. **Betek hen**, n'eus bet respont ebet d'hor goulennoù hanterouriezh digant ar prefetioù a c'hellomp tremen se goude 2 viz d'un **nac'hadenn**.

Nullet eo bet gant prefetioù zo darvoudoù eus hor skolioù (Tro Menez Are...). Gellout a reomp kompren kement-mañ met lakaat a ra en arvar hor skolioù a-fed an arc'hant ha n'eus bet digoll ebet evit se.

Perak ne zouj ket ar prefetioù d'al lezenn int sañset difenn ? Perak ne aozont ket an emvodoù raktreset en testennoù a zegasfent diskoulmoù a dra sur ? gant an emglevioù-mañ e c'hellfed digreskiñ efedoù ekonomikel an enkadenn yec'hedel.

Goulenn a reomp gant ar prefetioù aozañ an emvodoù-mañ evel ma 'z int raktreset el lezenn.

Skodenn skol (eil lodenn) : emzalc’h digem্পoell maered zo war ar renk !

Merzet hon eus ez eus maered war ar renk evit an dilennadegoù rannvro pe departamant war listennoù a zifenn sevenadur Breizh hag ar brezhoneg. Lod eus ar vaered-mañ na ginnigont ket un hentenn divyezhek en o c’humun ha na roont ket ar skodenn skol evit bugale o c’humun a zo en hor skolioù.

Pelec’h emañ al lojik politikel aze ? Daoust hag e talv ne souten ket tud al listennoù-mañ hon hentenn dre soubidigezh kevredigezhel ?

Goulenn a reomp digant ar vaered-mañ hag ar re e penn a listennoù sklaeraat an dra digem্পoell-mañ !

Kevratañ skol Sant-Ervlan : ar rektor a-enep al lezenn !

Digor eo Skol Sant-Ervlan abaoe 5 bloaz hag emañ ganti holl an amplegadoù ret evit bezañ kevratet. Goude bezañ goulennet meur a wech e kendalc’h ar rektor nac’hañ kevratañ ar skol. Abalamour d’an dra se n’hall ket ar skol-mañ tapout ar skodenn-skol ha ret mat eo kavout arc’hant e lec’h-all evit arc’hantaouiñ ar mont en dro, gopr an implijidi en o zouez. War chouk ar rouedad emañ an tri fost skolaer ivez, kement-se o sachañ war budjed hollek Diwan, anezhañ tizhet mat dija gant an enkadenn.

A-enep al lezenn eo ar rektor Marois penn-da-benn ! Perak seurt emzalc’h ma n’eo ket un enebiezh dre guzh ouzh hon hentenn !

Goulenn a reomp ma vo kevratet skol Sant-Ervlan e fin ar bloavezh-skol-mañ !

Eurvezhioù brezhoneg en eil derez : n’eus ket a-walc’h a eurvezhioù c’hoazh el liseoù !

Daoust d’al lusk brav d’an 20 a viz C’hwevrer evit a sell ouzh an eurvezhioù brezhoneg en eil derez ha promesa ar rektor diskoulmañ an traoù, n’hon eus ket a-walc’h a eurvezhioù evit al liseoù. Goude bezañ adlañset ar Rektordi ez eus bet respontet deomp en em zibab gant an debarzhadur eurvezhioù. Kaset hon eus ul lizher en-dro evit kaout ar peadra evit studi ar brezhoneg betek ar vachelouriezh.

Goulenn a reomp ma c’hello pep lisead kenderc’hel da zeskiñ o div yezh estren hag ar brezhoneg hep ma vo kevezerezh etre ar yezhoù-mañ.

Raktres skol Kernitron al lann : skoazell bihan digant dilennidi ar c’horn-bro !

Saludiñ a reomp startijenn an dud e penn ar raktres hag o deus dastumet arc’hant evit lañsañ ar raktres mui un niver a vugale dereat. Koulskoude e vank ur savadur hag evit poent **n’o deus ar vaered kavet diskoulm ebet.**

Prest omp da gavout asamblez an tu da zont a-benn

Evit an holl abegoù-se, deuit niverus evit difenn hon sevenadur, hon yezh ha hon doare da dreuzkas ar yezh dre soubidigezh, evit ma vevo hor yezhoù.

Betek an trec’h !!!



Appel à manifester le 29/05 à Guingamp

Rendez-vous à 13h30 à la gare de Guingamp

Dans la continuité de la belle mobilisation du 13 mars à Quimper, et de celle du 20 février à Brest, conjointement à l'appel lancé par le collectif Rouedad Ar Brezhoneg, soutenu par le collectif Pour Que Vivent Nos Langues sur une mobilisation nationale, par le collectif Unanet Evit Ar Brezhoneg et accompagnant au passage l'arrivée de la Redadeg,

Le réseau Diwan appelle à se mobiliser pour :

- **défendre la culture et la langue bretonne,**
- **protéger notre modèle de transmission par immersion qui est gravement mis en danger.**

Saisine du conseil constitutionnel contre la Loi Molac : une attaque contre notre modèle immersif associatif !

Suite à l'adoption de la loi Molac le 8 avril, une saisine du conseil constitutionnel aurait été orchestrée en sous-main par le cabinet du ministre de l'éducation nationale. Cette saisine attaque l'article sur le forfait scolaire qui concerne nos réseaux d'enseignements immersifs associatifs.

Lors des débats à l'assemblée, le ministre de l'éducation nationale parle de "Diwanisation" du système.

Mais de quoi ont-ils peur ? Qu'est qu'ils nous reprochent ? De former des élèves qui suivent parfaitement le programme de l'éducation nationale, qui ont d'excellents résultats aux évaluations et au bac et qui sont de parfaits locuteurs en breton ?

Diwan est un réseau d'écoles, laïques, gratuites et ouvertes à tou.te.s !

Forfaits scolaires : une inaction coupable des services de l'État !

Face au refus d'un accord ou au versement de montants insincères par les mairies, le code de l'éducation précise, dans l'article L442-5-1, "*A défaut d'accord, le représentant de l'Etat dans le département réunit le maire de la commune de résidence et le responsable de l'établissement concerné afin de permettre la résolution du différend en matière de participation financière, dans l'intérêt de la scolarisation des enfants concernés*"

En janvier, le réseau a officiellement sollicité la médiation des 5 préfectures départementales. **A ce jour**, nous n'avons pas obtenu de réponses à nos demandes d'arbitrage auprès des préfectures que nous pouvons considérer après 2 mois comme un **silence refus**.

Certaines préfectures ont annulé des événements de nos écoles (Tro Menez Are...). Ces annulations, que nous comprenons et que nous acceptons, mettent en difficulté les finances des écoles sans compensation.

Pourquoi les préfectures n'appliquent-elles pas la loi dont elles sont pourtant garanties ? Pourquoi n'organisent-elles pas les réunions prévues dans les textes qui permettraient d'obtenir des accords ? Ces accords permettraient d'atténuer en partie les effets économiques de la crise sanitaire, mais surtout, rendraient pérennes les 200 emplois de nos écoles.

Nous demandons aux préfectures d'organiser ces réunions conformément aux dispositions légales.

Forfaits scolaires (2ème partie) : l'incohérence de certains maires candidats !

Nous avons pu constater que certains maires et élus locaux se présentent aux élections régionales ou départementales sur des listes qui défendent la culture et la langue bretonne. Certains d'entre eux, qui ne proposent pas de filière bilingue dans leur commune, ne versent pas le forfait scolaire pour les élèves de leur commune qui sont scolarisés dans nos écoles.

Où est la cohérence politique ? Faut-il considérer que ces listes ne soutiennent pas notre modèle immersif associatif ?

Nous demandons un positionnement clair de ces maires candidats et des têtes de listes sur cette incohérence !

Contractualisation de l'école de Saint Herblain : le recteur dans l'illégalité !

L'école de Saint Herblain est ouverte depuis 5 ans et remplit toutes les conditions nécessaires à sa contractualisation. Pourtant, après plusieurs relances, le recteur refuse toujours sa contractualisation. Cette école ne peut donc pas percevoir le forfait scolaire et doit trouver d'autres financements pour couvrir les frais de fonctionnements dont les salaires des personnels non enseignants par exemple. Le réseau doit prendre en charge les 3 postes d'enseignants qui représentent un coût impactant fortement les finances du réseau, déjà tendues en ces périodes de crise.

Le recteur Marois est dans l'illégalité la plus totale ! Pourquoi cette attitude, si ce n'est encore une hostilité affichée envers notre modèle ?

Nous demandons à ce que l'école de Saint Herblain soit contractualisée en cette fin d'année scolaire !

Heures de breton dans le secondaire : toujours pas le compte dans les lycées !

Malgré la belle mobilisation du 20 février concernant les heures de breton dans le secondaire et l'engagement du recteur de régler la situation, nous n'avons pas le compte d'heures concernant les lycées. Après avoir relancé le rectorat, il nous a été répondu en substance, de faire avec la dotation d'heure.

Nous avons écrit à nouveau au recteur pour obtenir les moyens de la continuité de l'étude de la langue bretonne jusqu'au bac.

Nous demandons que chaque lycéen puisse poursuivre l'apprentissage de ses deux langues étrangères et celui de la langue bretonne, sans qu'il y ait concurrence entre ces langues.

Projet d'école de Notre Dame des Landes : en recherche de solution avec les élus locaux

!

Nous saluons le dynamisme des porteurs du projet qui ont rassemblé des fonds pour le lancement de l'école ainsi qu'un nombre d'enfants suffisant. Pourtant, la question des locaux reste problématique, **les maires du secteur n'ont proposé à ce jour aucune solution.**

Nous sommes disponibles pour trouver ensemble une issue favorable.

Pour toutes ces raisons, venez nombreux pour défendre notre culture, notre langue et notre modèle de transmission par l'immersion pour que vivent nos langues.

Rendez-vous samedi 29/05 à 13h30 à la gare de Guingamp !

Betek an trec'h !!!